

# Kân-bale pötred yaouank Breiz

The musical score is written in G major and 6/8 time. It consists of ten staves of music with lyrics underneath. The lyrics are in Breton. The score includes various musical notations such as notes, rests, and bar lines. The lyrics are: Bu - ga - le omp da Zou - e 'Vel hon za - dogwech - all. E - vel - te gant e zi - kour Nis tour-moouz ar fall; Nan eus ket bra-soc'h e - nor'vit käd Dou-e da dad D'e-zan hon nerz, Hon c'ha-lon Ha, ma ve red, hon gwad. Po - tred yaou-ank Breiz I - zel Poent eo se - vel ho penn Ya, mar kre - det c'hoaz dis - kou-ez oc'h gwir gris - te - nien Rag bre - man nep fell d'e-zan Be - van her - ve ar c'hiz A renk nac'h fe hon bro goz Ha trei kein d'an I - liz.

## DISKAN

*Bugale omp da Zoue 'vel hon zado gwech-all,  
Evelte gant e zikour ni stourmo ouz ar fall;  
Nan eus ket brasoc'h enor 'vit käd Doue da dad;  
D'Ean hon nerz, hon c'halon, ha, ma ve red, hon gwad!*

Pötred yaouank Breiz-Izel, poent eo sevel ho penn!  
Ya, mar kredet c'hoaz diskouez ez oc'h gwir gristenien;  
Rak breman nep fell d'ean bevan herve ar c'hiz  
A renk nac'h fe hon bro goz ha trei kein d'an Iliz.

Doue gare hon bro Frans, 'vel n'ball karet mui,  
Hag hi lake hec'h enor d'E garet, d'E veuli;  
Allaz, tud kriz o deus c'hoant, o deus c'hoant da ziframm  
Ar Frans, merc'h henan 'n Iliz, eus tre divrec'h he mamm.

Ha dre oll e rer trubuilh d'he bugale wellan,  
Kals zo skoet 'maes ar vro; ar re 'chom, 'n eur grenan,  
Dre goach 'renk ober ar vad. C'hoaz klevont ar re fall  
E dro d'ê gant kasoni, 'vel bleizi, o yudal.

Ha ken huel e yudont ma spont dirak o mouez  
Kals a gristenien glouar, ha kals o deus 'vel mez,  
Evel mez eus o Doue, ha, 'vit plijout d'an dud,  
E lec'h difen o c'hreden, a chom chouchet ha mud.

O Breiz-Izel, mamm ar zent, 'vidout pebez glac'har!  
'Vel da vugale gwech-all ne oa tud war douar;  
Ne oa 'velte kristenien kalonek ha leal,  
Kroaz Jezuz na lugerne nep lec'h 'vel war o zal!

Neb a ya enep Doue n'eo ket eur gwir-Vreizad;  
Hennez zo treitour d'e vro, treitour d'e vamm, d'e dad.  
Ouz e welet eo mantret ineo hon zent koz,  
Mezek 'vitan e gerent a bed er baradoz.

Ha te, bugel digalon, mar 'teus c'hoaz eun ine,  
Pa zonjez en ez kerent, pa bedez war o be,  
N'glevez ket eur vouez klemmus a zav eus an douar:  
« Evit petra, ma bugel, 'rez d'in ken bras glac'har? »

Ma! plego neb a garo dirak ar re 'deus c'hoant  
Da zianzav o Doue, ha fe o badeiant,  
Evidomp, ni anzavo, 'keit ma redo hon gwad,  
An Iliz evit hon mamm ha Doue 'vit hon zad.

Nan omp ket eneb an dud, na c'houlomp droug da zen,  
'Met a du omp gant Doue, evel gwir gristenien.  
Gant gwad, en Frans, 'oa prenet al liberte gwech-all;  
D'imp-ni, d'an holl eo dleet, kenkouls ha d'ar re fall.

Ni zo yaouank ha leal; war roujo hon zado,  
Kaer vo harzal ha c'hoari, gant kalon ni 'gerzo;  
Rak ni dianzav Doue hag enor Breiz Izel?  
Dianzav al liberte? Nan! Nan! kentoc'h mervel!!

DRASKIK.